

Nag e pep lec'h e Pariz

Gavotenn Goueled-Leon

Ton : hengounel – Pozioù : Maiwenn Morvan (2022)

Nag e pep lec'h e Pariz
Ez eus tud war ar renk

C'hoant 'deus bezañ dilennet
Me oar o santimant

Ar c'henta zo prezidant
'Vit ar re binvidik

An eil a zo ur paotr glaz
Gant e scooter tre dan

An trede zo rouanez
Bro an dud koñdaonet

Un' all zo ar Republik
'Vit an ologrammou

Un' all a zo penherez
Dilezet gant tout 'n dud

Daou all zo labourerien
War raok kamaraded !

Un' all c'hoaz zo un euzhvil
A skarzhje e dad (ma zad) kuit

Netra diwar ar re all
Vint ket trec'h forzh penaos !

Benn eizh deiz vo ret votiñ
Penaos choaz etrezo ?

*Et partout à Paris
Il y a des candidats
Ils veulent être élus
Je connais leur sentiment*

*Le premier est président
Pour les riches*

*Le deuxième est un gars vert
Sur son scooter électrique*

*La troisième est reine
Du pays des condamnés*

*Un autre est la République
Des hologrammes*

*Une autre est une héritière
Abandonnée par tout le monde*

*Deux autres sont des ouvriers
En avant camarades !*

*Un autre est un monstre
Qui virerait son/mon père [de
Judikael]*

*Rien sur les autres
Ils ne gagneront pas de toute façon*

*Dans huit jours il faudra voter
Comment choisir ?*